



K
R
O
A

B
R
E
I
Z

MAE 1948 ① PRIZ : 25 LUR

TAOLENN AN NIVERENN-MAN

Tad Trebaol : Salud, Aotrou 'n Eskob	Pajenn	1
Y.-F. ar Falc'hun : Da voule'ha an ero nevez	»	2
Y.-P. Pencreac'h : Degasit ho Spered	»	4
An Tad : Gouellou ar miz	»	5
Morvan Gollo : Pelec'h eman an dud e Breiz ?	»	6
P.-T. : Korrida Bilbao	»	7
K. Riou : Hon oberou mat hag an Itron Varia	»	9
Evnig-Penn-ar-C'hoad : War hentou Breiz	»	11
Mari Seite : Ar brezel e Breiz-Izel	»	12
Yann ar Gwalc'h : Maro an Aotrou Saout	»	15
Y.-F. ar F... : Keleier Lennit	»	16

L. Bleunven : Korn ar merour.

Gwennael : An nevez-amzer

War golo an niverenn-man eus Kroaz Breiz e weler skeudenn tour Kleden-Poher, tennet gant Gilles Bainez, eus Hédé (Il-ha-Gwilen).

PRIZIOU :

An niverenn-man	25 lur	} Gwelit korn ar merour, e trede pajenn ar golo.
Koumanant ordinal	200 lur	
Koumanant a zikour	300 lur	
Koumanant a enor	500 lur	

Kas an arc'hant da : M^r l'Abbé Laurent BLEUNVEN
Recteur de Plomelin, par Quimper (Finistère)

Skrivit sklaer hoc'h anioù, mar plij

Koumanantit! Klaskit deomp koumananterien!

Micherourien, tiez a genwerz!

grit brud d'ho staliou e Kroaz-Breiz!

A33 622



Je suis heureux de saluer la parution de ce premier numéro de "Kroaz Breiz". A la jeune revue, je salue de tout cœur une heureuse croissance.

Que "Kroaz Breiz" aide les Bretons à mieux connaître les splendeurs de leur foi chrétienne, et soit pour eux un "témoin du Christ" et de sa vérité.

Qu'elle développe en tous un amour plus grand de notre Bretagne et de ses beautés incomparables.

Que Dieu bénisse rédacteurs et lecteurs de "Kroaz Breiz"!

ANDRÉ,

Evêque de Quimper et de Léon
23 Avril 1948

Salud, Aotrou 'n Eskob!

Salud Aotrou 'n Eskob, hor Pastor nevez:
Setu ni, gant joa ha kalz levenez,
Deuet d'ho saludi a-greiz hor c'halon:
Bevet Aotrou 'n Eskob Kemper ha Leon.



Salud, Aotrou 'n Eskob... Bennoz da Jezuz,
'neus teurvezet rei deomp eur Pastor nerzus,
Aketus ha santel, helavar ouspenn,
Eun Eskob kalonek : skouer a veleien.

Hon Tad mat, bennigit ho pugele baour.
M'hon eus pennou kalet ha kalonou aour,
Bleinet ganeoc'h-c'houi, Tad, holl sur ni yelo,
Kentoc'h eget trei kein, war-eeun d'ar maro.

G. M. Trébaol, O. M. I.

DA VOULC'HA AN ERO NEVEZ

« Kroaz Breiz n'eo ket eur gelaouenn nevez !

Dre ano, e kendalc'h ar gelaouenn embannet epad eun nebeud miziou gant Tadou. Kabusined Rozgo, pa voe difennet outo, breman 'z eus tri bloaz, kenderc'hel gant ar « *Vuhez kristen* », ken anavezet a-dreuz Breiz : re vat labour a raent evit ar Feiz ha buhez Vreiz !... Ijin bugale an denvalijenn en deus trec'het evit eur mare : Kroaz Breiz, warlerc'h ar Vuhez Kristen, a zo bet douaret.

Dre nerz an hevelep ijin, d'ar memes mare, oa bet douaret « *Feiz ha Breiz* » : aman, siouaz, e redas ar gwad ! Araok Feiz ha Breiz he-unan, chomet e buhez epad eun nebeud miziou goude an darvoud, e oa bet lakaet en douar korf he rener, ar « *Stourmer* », an Ao. Y.-V. Perrot, a verve kement ennan spered Vreiz ha karantez ar C'hrist : diskaret oa bet en eur muntr euzus.

Met setu miz Mae !

E-diabarz hon douarou, e tremen hep ehan eul labour kuzet ; war ar pezh a vije kredet maro da vat, e tispak eur vuhez nevez, leun a nerz, ha kaer da zaoulagad mab-den ! War gwrizioù hanter-zec'h hag had brein da welet, e tiwan plantennou nevez, mall ganto kreski evit dougen dizale bleunioù a bep liou, frouez hag eostou a bep doare. Ar gwez, ha ne ziskouezent deomp nemet izili dizec'het ha divrec'h lakaet en noaz gant ar goanv, a red enno a-nevez gwad buhezu ar seo : emaint goloet adarre gant an dilhajou a bep liou roet dezo gant ar C'hrouer,

Kroaz Breiz a zent ouz lezenn ar vuhez !

An had a zo bet taolet en douar e-kreiz ar c'haon hag ar glac'har : warnan e tiwan eun eost leun a levenez.

Er bloavezioù tremenet, Breiziz, mac'hagnet, gwasket gant an dismegans hag ar gasoni, n'o deus graet nemet para an taolioù eus o gwella, ha dastum o nerz evit an amzer da-zont. Roet o deus peoc'h evid mad ar peoc'h : pennou skanv a grede e oant douaret da vat, hag a gane e-kichen o bez.

Setu deuet an nevez-amzer ! Na glevit-hu ket, pobl Vreiz, mouez ho kwella bugale o sevel dre ar vro a-bez ? Skanv eo c'hoaz marteze, hag ar re ne ouzont ket teurel evez ne glevont netra c'hoaz. Met ar

vuhez ne zihun nemet a-nebeudou, ha ne ra ket a drouz o tont. Pa vez degouezet e barr he brud, e vez klevet ha gwelet mat !

Kroaz Breiz a deu da unani he mouez gant hini bugale Vreiz, evit kreski kaerder o c'hanaouenn, hag o zikour da zével Breiz nevez.

He mouez a vo da genta hini ar Feiz e Breiz ; gwirionez an Aotrou Doue a dle sklerijenna spered ar Vretoned, araok pep tra ; hepti, n'eus diazez evit an ti nevez nemet war an traez, ha Breiz a c'houlenn beza harpet war ar maen. Ar C'hrist eo ar maen-diazez, an hini a jom divrall betek eur diweza ar bed-man, hag abalamour-da-ze, e fell deomp rei en hor c'helaouenn ar plas kenta d'ar C'hrist ha d'e Groas a zilvidiges. Evelse e vezo pinvidikaet sperejou hag eneoù ar Vretoned eus ar pezh a ra o brasder divent dirak an Tad a zo en nenv, hag a-unan gantan.

Met mouez Kroaz Breiz a vezo ive mouez Vreiz : buhez dreist-natur an ene war an douar-man a zo liammet ouz buhez an ene hag ar c'horf hervez an natur. Stag eo evelse ouz eun doare-beva, ouz eun doare da gompren buhez an douar-man ; stag eo, gant an holl liammou a zav dre nerz ar vuhez, ouz ar vro, an dud, ar familh... Ha ma vez klanv pe zistres an doare-beva hervez an natur, e vo ive drouklivet

buhez ar feiz kristen. Met mar deo gwriziennet mat an den e douar e vro, e spered e familh, neuze eo aesoc'h dezana en em zével kouls evit ar bed-man eget evit ar bed all, ha kreski, kreski...

Kement tra a zell ouz buhez ar Vretoned a vezo eta hon tra e Kroaz Breiz : feillout a ra dezi beza eul liammet etre an holl Vretoned ; rak unvaniez a zo nerz. Degas a ray magadurez evit ar sperejou breizat, en eur rei da anaout istor ha spered Vreiz, ha dreist-holl ar yez vrezonek, fiziet ennomp war an douar-man evel tenzor hor spered.

Klask a ray c'hoaz gwellaat doare-beva ar c'horf, deski an doareoù da denna muioc'h-mui a vad eus douar Vreiz, a zo breman brudet he finvidigez dre ar vro-abez, hag a c'hell c'hoaz beza kae-roc'h ha founnusoc'h.

Displega a ray ive Kroaz Breiz penaos lakaat plijusoc'h ar vuhez en hon tiegezioù hag en hor bro, rak evidomp-ni, pep kaerder a dle beza eun dra zakr, dre m'eo eun tanva eus kaerder divent an Tad eus en nenv.

En eur ger, Kroaz Breiz a gemer plas ar « *Vuhez Kristen* » ha « *Feiz ha Breiz* » : he youl eo kenderc'hel al labour vat graet en


amzerioù tremenet. Fizians hon eus e teuo a-benn eus he youl gwelloc'h-gwella : gortozet eo gant kalz Bretoned. Harpet eo gant ar re o deus graet lufr ar Vuhez kristen ha Feiz ha Breiz, hag e kichen al labourerien goz, ez eus bodet re yaouank : Evelse e vezo graet eur gelaouenn nerzus ha leun a vuhez. Hag a-vreman, rener nevez Kroaz Breiz a zo laouen o lavarout e anaoudegez d'ar re holl a zegas dezana eun harp ken c'houek, dreist-holl d'an Ao. Bleunven, en deus bet ar vadelez, daoust d'e garg a berson, da zamma war e choug ar garg pouezus m'eo beza merour eur gelaouenn en amzer hirio.

Gant fizians ha levenez e sellomp ouz an amzer da zont : rak heman a vezo kaer p'en en zikourimp holl d'hen ober evelse.

Plijet gant Santez Anna ha Sant Erwan, paeroned Breiz e lein an nenv, goulenn war hor bro ha war hol labour, bennoz an Aotrou Doue : kinnig a reomp an niverenn genta-man da Zant Erwan, a lidomp e c'houel d'an 19 eus ar miz, e testenit ez omp Bretoned eveltan, stag ouz ar Feiz hag ouz Breiz.

War araok eta, evit Doue ha Breiz !

Y-Fransez ar Falc'hun
rener Kroaz-Breiz.



« EMITTE SPIRITUM TUUM : DEGASIT HO SPERED »

(Pedenn evit sul ar Pantekost)

« Goulenn a rin digant va Zad, hag e roio deoc'h eur Skoazeller all, evit ma vezo da viken ganeoc'h, ar Spered a wirionez ». (avtel Sant Yann, XIV/16).

O va Zalver, er Pantekost trubuilhus-man, degasit deomp-ni ivez ar Spered a wirionez da skora, war ar memes tro, Feiz ha Breiz.

FEIZ. — Bagadou a dud badezet a zo e Breiz, met pet kristen gwirion ? E Bro-C'hall hervez aotrou Archeskob Toulouse, ez eus wardro 39 million a dud badezet, hag a-vec'h 3 million a gristenien wirion. Spontus !

E Breiz ez a gwelloc'h ? Ya. — Met sellit piz en dro deoc'h : gant petra eo chalet an dud ? Gant prena, gwerza, kaout drevajou, maga chat-tal, ober peskerezh, hag all... A-benn herr ez eont e straedou buhez ar c'horf.

Ne vijent ket da damall, ma ne gollfent ket ar gwel eus buhez o ene. Siouaz ! Pet a zonj e buhez o ene, ar vuhez kristen, eun elfenn eus buhez Doue e-unan, prisiuz dreist pep tra, hag eo ret deomp kemer preder ganti araok ha dreist pep tra ? Petra dalv d'an den gounit ar bed holl, ma teu da goll e ene ?

Hogen, pet, hag a zo kristenien war o meno, a zo henvel ouz Joinville, kenell ar roue Sant Loetiz IX en Emgrouaz (croisade) !

« Seneskal, a lavare dezan ar Roue, ma vije ret ober an diviz, petra vefe ar gwella ganeoc'h, kaout al lorgnez pe ober eur pec'hed marvel ? »

Aotrou Roue, gwelloc'h e vije ganeen ober kant pec'hed marvel eget kaout al lorgnez.

« Evel eun den sot ho peus respontet, eme ar Roue : dre al lorgnez, n'eus klanv nemet ar c'horf ; dre ar pec'hed marvel e lazit hoc'h ene, e c'hounezit an ifern ! »

Pet Joinville n'eus ket e Breiz en deiz hirio ?

Pet ha pet all hag a zo falloc'h c'hoaz o doare, kollet m'o deus an anaoudegez a Zoue hag an doujans dleet d'e lezenn ?

O va Zalver, degasit dezo ar Spered a wirionez !

BREIZ. — Bagadou a dud a zo e Breiz, met pet hag o deus preder gant o bro ? Labourat a reont a laz-korf, ha gounit danvez, ha kreski an aezament en o ziegeziou, ha mat a reont !

Met ankounac'haat a reont ivez eo graet an dud evit beva asamblez en o familh, en o farrez, en o bro Vreiz.

Hogen, piou o deus bemdez Breiz en o c'harg ? Ma ne zifenn ket Breiz o Breiz, n'eo ket ar broiou all a deuto d'he difenn !

Pet n'eus ket hag o deus mez o veza Breizad ?

Danvez mat a zo koulskoude oc'h ober Breiz ! Lakit eur Breizad war al labour, ar c'henwerz, an ijinerez, ar studi... er penn kenta e vezo ma kred kemer e lans.

Pet Breizad ne gaver ket o kaout mez eus e yez : eur yez koz, eur yez paour !

Koz eo, sur, pegwir edo e-kreiz he sked, p'edo c'hoaz ar galleg en e gavel. Met paour n'eo ket, hag emanihi bemdez o plividikaat, dreist-holl en hon amzer, daoust d'ar brezel a vez graet dezi : sederaat ha splan-naat a ray c'hoaz, etre daouarn an dud desket !

Pet a zo hag o deus mez eus giziou Breiz ! Giziou diwar ar Maez !

Ne damallimp ket ar giziou nevez, mar dint fur, ha gouest da wellaat ar vuhez... Ha koulskoude, keuz a vefe d'ar chupenn ha d'ar c'houef-dantelezh ! Pa vez c'hoant beza kaer, sachha daoulagad an estren, n'eman ket ar mare da glask tokou na mantellou Paris : den ne deuto eus Paris d'o gwelout e Breiz. Met ar chupenn, ar c'houef, hag an traou all, setu ar pezh ne gaver nemet e Breiz, hag a deuer da welout e Breiz !

E pep tra, eomp d'ar wirionez gant holl nerz hor c'halon ; kasaomp ar gevier o deus graet deomp kement a zroug, hag hor c'has war hent ar baourentez...

Evelse, dre garantez ar wirionez, e vezo digor hon ene da c'houezadenn ar Spered Santel, an Hini a zo ar Wirionez !

O va Zalver, degasit deomp ho Spered a wirionez !

Y.-P. PENCREAC'H.

Goueliou ar Miz

Evit ren eur vuhez « kristen », — da lavarout eo eur vuhez din eus ar C'hrist, — n'eus ket gwelloc'h doare eget kemer perz e goueliou hag e ofisou an Iliz, a zo bet karget gant Hor Zalver d'hor sklerijenna ha d'hon henchha war-du ar Baradoz. Abalamour da-ze e vo kavet aman e pep niverenn eus ar gelaouenn, eun tammig kelennadurezh diwar-benn goueliou ar miz.

Da genta, taolomp evez mat ez eo miz Mae miz ar Werc'hez Vari. Bezomp aketus da lakaet e-harz he skeudennou ha war hec'h aoteriou eun doarn eus ar bleuniou dudius a vez kavet e pep lec'h d'ar poentman eus ar bloas ; en iliz-parrez pe e gêr, kemeromp perz er pedennou a vezo lavaret evit hec'h enori ha goulennomp diganti kement gras hon eus ezomm evitomp hon unan, evit hon tud, evit an Iliz har ar vro. Ra blijo ganti skulh he gwella bennoziou war ar gelaouenn-man, evit ma raio kalz vad dre Vreiz a-bez o terc'hel sounn hag uhel dirak an holl « Kroas » venniget Hor Zalver Jezuz-Krist !

3, 4, 5 a viz Mae. — Ar Rogastionou. Goulennomp digant an Aotrou Doue skulh e vennoziou war hor madou eus ar bed-man ha lakaat hon douarou da zougen frouez, met en hevelep amzer dalc'homp sonj eus ar pezh en deus lavaret d'eomp Hor Zalver : « Klaskit da genta Rouantelezh Doue hag an holl draou all a vo roet d'eoc'h war ar marc'had ».

6 a viz Mae. — Ar Yaou-Bask : « Emaoun o vont da gempenn d'eoc'h eur plas evit ma vezoc'h gan'n e lec'h ma vin va-unan ». Sonjomp alies er Baradoz. Eno eman hon ti gwirion, eno eman Jezuz ouz hor gedal !

9 a viz Mae. — Ar Zul e etzved ar Yaou-Bask : « Me a zegaso d'eoc'h ar spered a wirionez... » Evit beza kristenien vat, bon eus holl ezomm eus sklerijenn hag eus nerz ar Spered-Santel. Pedomp Hor Zalver d'e zegas d'eomp da zuz ar Pantekost, evel m'en deus prometet, ha lakomp kaer hon ene evit ober dezan eun deger mat.


16 a viz Mae. — Sul ar Pantekost : « Veni, Sancte Spiritus »... Deuit, o Spered Santel, deuit e-barz hon e-neou, gant ho sklerijenn evit hon henchha, gant ho nerz evit hon di-wall diouz pep droug hag hor sikour da gerzout war an hent mat. Neuze e vimp beo-buhezek, laouen hag eürus, rak gant ho sklerijenn ha gant ho nerz e vez kavet atao ar gwir vuhez, ar gwir levezeg hag ar gwir eürusted.

19 a viz Mae. — Sant Erwan, patron Breiz. Ra skulho e vennoz war hor bro garet ha war he holl bugale, ar re a zo er gêr, hag ivez ar re a zo pell diouz ar gêr ! Eus lein an Nenvou, ra zegaso skoazell ha sikour d'ar re-holl a labour da zerc'hel enni ken birvidik ha biskoas ar spered hag ar feiz kristen he deus graet anezl unan eus kaera broiou a zo er bed !

19, 21 ha 22 Mae. — Ar pevare amzer. N'eus na yun na vijil. Koulskoude, arabat ankounac'haat e tleomp ober pinijenn, ma fell d'eomp ren eur vuhez santel, mirout ouz justis Doue da skel war ar bed, ha lakaat ar bec'herien da zistrei outan.

27 a viz Mae. — Gouel ar Zakramant meulet ra vezo ! « An neb a zebr va c'horf, a fom ennoun ha me ennou ». O ! na pebez promesa : dre ar gomunion, Doue a ziskenn betek an den, en em unan gantan hag a ro dezan perz en e vuhez. Meulomp, enoromp Hor Zalver e Sakramant an Aoter, met, ouspenn-se, prometomp dezan mont d'e reseo ouz an Daol-Zantel allesa ma c'hellimp.

AN TAD.



Pelec'h eman an dud e Breiz ?

I

D'an 10 a viz Meurzh 1946 ez eus bet graet eun niveradenn-dud (recensement) e Bro-c'hall. Abaoe 1936 n'oa bet graet hini ebet. N'eo ket sur ec'h anavezfec'h pegement a dud a zo o chom e Breiz d'ar mare-man. Talvoudous eo ber gouzout koulz-koude, ha fizians am eus e rin plijadur d'eo'h o lakaat dirak ho taoulagad taolenn hor Breiz d'an 10 a viz Meurzh 1946.

Lakaat a ran aman e-kichen si-frou ar bloaz 1946, re ar bloaz 1921, an niveradenn genta war-lerc'h ar Brezel-Bras 1914-18 :

Departamant	1921	1946
Penn-ar-Bed (Finistère)	762.514	724.735
Aod-an-Hanternoz (Côtes-du-Nord)	557.824	526.955
Morbihan	546.047	508.884
Il-ha-Gwilen	558.574	578.246
Loar-Izela	649.691	665.064

Breiz a-bez 3.074.650 3.001.884

E. pad ar 25 vloaz diweza-man, eta, Breiz he deus kollet 72.766 a dud, Er bloaz 1936, e oa e Breiz 3.056.075 a dud. Etre 1921 ha 1936, Breiz he deus kollet eta 18.575 a dud.

Hag etre 1937 ha 1946, he deus kollet 54.191. *En dek vloaz diweza-man he deus kollet eta teir gwech muio'h a dud eget e-pad ar 15 bloaz a-raok.* Etre an daou vrezel e-pad ma kolle Breiz 18.575 a dud, poblans Bro-c'hall a bigne eus 39.209.518 a dud da 41.907.056 den, en eur c'hounit evelse 2.697.538 den.

Etre 1936 ha 1946, poblans Bro-c'hall a-bez a zo kouezet eus 41.907.056 a dud da 40.517.923, en eur goll evelse 1.389.133 den. Diouz an niver a dud a oa enni e-kenver ar pez a oa e Bro-c'hall a-bez e 1936, Breiz he deus kollet an hanter nebeutoc'h a dud eget ar peurrest eus Bro-c'hall. Evelse, Breiz a zebiant beza c'hoaz buhezecoc'h eget ar boblans a zo endro d'ezl.

— Met sellomp a-dost ouz pep hini eus an departamantou, etre 1936 ha 1946 :

Aod-an-Hanternoz : 4.385 a goll.
Penn-ar-Bed : 32.058 a goll.
Morbihan : 35.364 a goll.
Il-ha-Gwilen : 12.480 a c'hounid.
Loar-Izela : 5.636 a c'hounid.

An diskar, evel ma c'hellit eyessaat a bouez dreist-holl war ar Morbihan ha Penn-ar-Bed. Daoust hag etre 1936 ha 1939, mare bras a zivroerez eo bet c'hoarvezet dreist-holl an diskar-ze pe e-pad ar brezel ?

Eun dra vat e vije deomp her gouzout splann. Met ne gav ket din e vije gelllet lakaat pep tra war gont an divroerez. Re anat eo, a gredan, eman klanv hor bro gant an helevap klenved eget Bro-C'hall : ar paouez-genel (dénatalité). Sur omp da Serval m'en em lezomp da vont. Mar fell deomp beva n'hon eus nemet eun dra da ober : dihua ha stourm. Ha pa lavaran stourm e lavaran poania da renka an traoù e-doare ma c'helio ar muti ar gwella a dud beva war douar hor bro. Ha war ar poent-man an dud desket, dreist-holl ar re yaouank, hag an dud pinvidik, o deus da zonjal er pez a c'hortoz Breiz diganto, hag er gefridi enorus a zo fiziet enno : lakaat eur Bobl da veva.

II. — Ar c'hêriou

Setu aman ar roll eus ar re anezo a zav en tu-hont da 10.000 den :

1. Naoned	200.265
2. Roazon	113.781
3. Brest	74.991
4. Sant-Erieg	36.674
5. Gwened	28.189
6. Douarnenez	20.564
7. Kemper	20.149
8. Foujera	19.281
9. Escoubiac-La Baule	15.205
10. Montroulez	15.121
11. Dinan	12.737
12. An Orlant	11.838
13. Sant-Nazer	11.802
14. Sant-Malo	11.311
15. Landerne	10.976
16. Pondi	10.878
17. Kemperle	10.679
18. Konkerne	10.519

An 18 ker-ze a zastum 634.959 den eus poblans Vreiz. Lakaet a-gostez Roazon hag an Naoned, ar c'hêriou-ze n'int ket gwall vras. Met ret eo eyessaat ez eus seiz anezo dija e departamant Penn-ar-Bed.

Setu aze, war-bouez nebeut, petra a c'hellomp tenna, da dalvezout deomp, eus niveradenn an 10 a viz meurzh 1946.

Morvan GOLLO.

KORRIDA BILBAO

Vad a ra c'hoarzin e-kreiz ar boan : n'eus ket gwelloc'h evit skañvaat ar zamm.

Pa oa samm an estren war hor bro, er bloaveziou tremenel, eo bet ret ive c'hoarzin evit chom kreñv... Ar gontadenn a gavot amañ a zo bet savet e miz mae 1944, diwar eun istor-veer he deus graet moarvat an hanter eus tro ar bed. Gouest eo da laouenaat c'hoaz hon devezioù a drubuilh.

E Bro-Spagn, e vez alies redadeg-tirvi : dirak ar bobl, bodet, e vez degaset Kolas er-maez eus e graou ! Tud a vicher, an doreadored, a vez karget d'e heskina, betek ma sav kounnar ennañ, o ficha dirazañ lien ruz, hag o sankan en e groc'hen birow lemm... Pa vez skuizet mat Kolas, goude m'en devez awe-chou gloazet pe gaset d'ar bed all eun nebeud kezeg pe dud, e vez laketa d'ar maro gant mestr bras ar c'hoari, ar « Matador », nemet Kolas e-unan eo a jomfe mestr war an dachenn. Se a c'hell c'hoarvezout : selaouit kentoc'h.

Eur c'helou sebezus zo deut, n'oun ket penaos, Dreist ar mor bras, eus a Vro-Zaoz :
Ar fuhrer Hitler zo maro,
Bet toullgovet gant eun taro !
N'eo ket er gêr, ahont en Almagn,
Met e Bilbao, porz-mor a Spagn...
Mall bras am eus d'her c'honta deoc'h,
Rak breman, kredabl, e vo peoc'h.

Breman 'z eus telr zizun, e Korrida Bilbao,
Giz toreadered e oa tri ganfart brao !
Anaout a rit mat pep hini :
Hitler, Churchill ha Benito Mussolini,
Franco, mestr war ar Spagn, 'n doa kemennet dezo :
« Deuit aman, pôtred, deuit ho tri. Neb a vazo
War al leurenn vras, ar gwella
Da gas tirvi da rodella
Hennes a vo karget da zével deomp ar reol
A verko da bep pobl e blas dindan an heol.
Ha peoc'h ! Mall eo diarhenn stourmadou
A skuilh war ar bed holl ar gwad a vagadou !



Hag e oant deut raktal, o zri, 'n eun nijadenn,
Unan eus a Londrez, daou a Verchtesgaden.
En dro d'al leurenn vras
'c'hellit kredi oa tud muio'h eget biskoaz.
Hag hon tri ganfart war al leur,
Kalon ruz war o relijiou,
Birow lemm en o dornigou,
O doa terzienn moarvat en eur c'hedat an eur.

Dizale, renket mat an traoù,
Voe tennet Kolas er maez d'e graou :
Eun taro bras, hir e gorniel,
Beget lemm evel bigorniel...
Eur zell a-zehou, eur zell a-gleiz,
Kolas eur pennad a jom reiz...
Met pa wel a-dost Benito,
Gouzoug ledan ha penn disto,
Hanter-guzet e galson ruz
Gant e gov teo hag e gig druz,
E sav gwad, d'e benn hag e lamm a-benn-herr,
Sounn e lost, d'e strinkal en êr.
Met Benito n'eo ket nec'het :
Pa n'eus ket amzer da dec'het,
Ec'h en em led, ec'h en em daol a flao,
'vel eun touseg, war bevar bao,
— ('vel m'eo boazet d'ober dirak al loariadenn
A zo mestr e Berchtesgaden !)
Ha Kolas, gwintet dreist, a jom eno bamet,
O klask gouzout dreist petra 'n deus lammet.



Goude 'sallh war Churchill... Heman, lampr e yennou,
'n eur zistaga kildroennou,
Hag o fichal e damm lien,
En em zach, vel eur zilienn,
Kolaz jom boud bep taol ! Kaeroc'h c'hoaz : Churchill goz
Graet korn-boud gant e vez,
Hag oc'h ober an neuz da skrabat e varo,
A dint eur ger bennak e skouarn an taro...

Satordeien ! Kerkent, Kolaz, 'vel penafollet,
War an Hitler 'zo dirollet.
Mont a ra dezan war ceun-tenn,
Tortet e gein ha pleget e benn,
Hag hep aon rak e vec'hienn,
Nag e virou nag e lien,
Gant e gorn e strink ar pabor
Ken uhel ha menez Thabor.
E strink anezan c'hoaz n'ouzoun ket pet gwech all,
Evel eur c'hloc'h lakët e brall ;
Ha hep tro, pa deu da goueza,
Gant e dreid e vres anezan,
Hag her skrab gant e ivinou,
An enenn leun e c'henou.
— « Bravo, toro ! Bravo, toro !
Bremen 'chomo saout da c'horro, »
Eme Churchill goz, ar mastin,
Staget leiz e gov da c'hoarzin ;
« Bravo, toro, 'man diskaret ar c'hagn ! »
Hag e strak daouarn gwazed ha merc'hed Spagn.
Ha dizale eus ar Fuhrer bras ne jom ken
Nemet tammon leun-wad, skolpajou tomm ha yen :
Ha warno gourvezet, Kolas 'voud en e yez :
« c'hanta, Fuhrer, penaos e rez ? »



Mouso, neuze, deut d'ardisaat,
A ya da gaout, Churchill: « Asa 'ta, va den mat,
Emezan, petra 'peus c'houl tintet en e skouarn
Da Golas e gorniel houarn,
'vit e lakaat da goularnari,
D'ober ker bras charivari ? »
— Me, 'me Churchill, roet am eus dezan d'anaout
Eo hennont a laer e zaout,
Oc'h ober rekizisionou,
Eus Rozon betek Treglonoù.
Ah ! Mouso géz, gwelet ac'h eus,
Pebez kounnar ha pebez freuz !
Faotr ar Groaz-kamm ne deui mui, 'n eur gonta gevier,
Da laerez saout er parkeier. »

Gant aon da baka kement all,
Moussolini gantan voe mail
Sevel d'ar red, en e garr-mij
'vit mont da b'lec'h, mar plij
Da di 'n Negus, tud keiz !
Da di Negus an Ethiopi,
Da c'houlenn dilhad ha lojeiz
Hag eun nebeut makaroni !

Ne jomie mui war al leur
Nemet Churchill goz a Vreiz-Veur.
Setu ma 'c'h embannas Franco :
« Ar bed holl a ranko
Lavaret eur wech all (ha Kolas vo bet kaoz !) :
Ar maout adarre da Yann-Zaoz !
Spagnoled ! Churchill goz, dizale, 'zavo deoc'h,
War bruzun ar Groaz-kamm, reolenn aour ar peoc'h. »

P. T.



HON OBEROU MAT HAG AN ITRON - VARIA

Dispaka 'ra « Kroaz Breiz » he diouaskell gant miz mae, miz an
Itron Varia, er bloavez kenta m'eo lidet gouel Sant Loeiz-Mari a Von-
fort, ar Breizad kalonek lakaet war roll ar Zent d'an 20 a viz gouere 1947.

Setu perak hon eus sonjet e vefe deuet mat er gelaouenn nevez eur
pennadig tennet eus skridoù Sant Loeiz-Mari, unan eur ar brasa dok-
tored o deus skrivet diwar-benn ar Werc'hez.

Kemeret eo ar bajenn-man en e levr « *Traité de la vraie dévotion
à la Sainte Vierge* » (Levr-dourn ar gwir devozion d'ar Werc'hez) e-
lec'h ma tispieg ar pezh a rankomp da ober evit beza gwir sklaved an
Itron Varia hag, evelse, servijerien vat Hor Salver Jezuz-Krist hervez
promesaou hor Badiziant.

Kaourintin RIOU.

Puraat a ra an Itron Varia hon oberou mat, o skarza diouto holl
loustont an emc'hloar, hag ar garantezig ouz ar bed-krouet, a oar ez
em zlla, hep ma c'houzer, er re wella anezo. Adalek m'emañt etre he
daouarn glan ha frouezus-meurbet, ez eo lammet, diouz ar prof a ginni-
ger d'Ezi, kement tra mastaret pe d'barfet a vefe ennan, gant an
daouarn-ze ha n'int bet morse saotret na didalvez.

O c'haeraat a ra, o ficha anezo gant he meritou hag he vertuziou.
C'hoarvezout a ra evel mar dafe eul labourer-douar, c'hoant dezan gou-
nit mignonlezh ha grad-vat ar roue, da gaout ar rouanez ha da brofa
d'ezi eun aval, e holl leve, evit ma kinnigo-hi ar frouezenn-ze d'ar roue.
Degemeret ganti profig distar ar c'houer, e lakafe ar rouanez an aval
war eur mell plad aour kaer. Hag hi eo hag a ginnigfe anezan evelse,
d'ar roue, a-berz ar c'houer. Daoust m'eo amzere drezan e-unan da veza
kinniget d'eur roue, e teufe neuze an aval da veza eur prof dereat ouz
e Veurdez, abalamour d'ar plad aour e-lec'h m'eman ha d'an hini a gin-
nig anezan.

Da Jezuz-Krist e kinnig-hi hon oberou mat, rak ne zalc'h ganti, da
vat, netra eus kement a ginniger dezi ; da Jezuz, ez leal, e kas-hi pep
tra. Ma roer dezi, da Jezuz eo e roer ez rekis ; ma veuler ha kanmeuler
anezi, hi, dioustu, a veul hag a ganmeul Jezuz. Bremen, evel gwechall
pa voe meulet gant Santez Elizabet, e kan-hi pa'z eo meulet : « *Magni-
ficat anima mea Dominum* ».

Ober a ra da Jezuz degemer an oberou mat-se, daoust pegen bihan
ha paour e vefe ar prof e-kenver Sant ar Zent ha Roue ar roused. Pa
ginnigomp eun dra bennak da Jezuz ni hon-unan hag hepken gant hon
ijñ hag hon doare hon-unan, e sell piz Jezuz ouz ar prof hag altes e
nac'h anezan abalamour da loustoni an emgaranter peget outan, evel
ma nac'has gwechall sakrifisou ar Yuzevien leun a ourgouilh. Met pa
ginniger dezan eun dra bennak dre zaouarn glan ha gwerc'h e vuita-
karet, ez eer dezan dre an tu gwan, ma 'z eo permetet komz evelse ;
ne sell ket kement ouz an dra a roer dezan eget ouz e Vamm vat a gin-
nig an dra dezan ; muioc'h e taol evez ouz an hini a zegas dezan ar prof
eget a belec'h e teu ar prof. Evelse, Mari, ha na vez biken argaset, hogen
atao degemeret gant he Mab, a laka e Veurdez da gaout mat kement a
ginnig dezi bihan pe vras : a-walc'h eo da Vari kinnig ar prof evit ma
plijo da Jezuz. Hennes eo an ali bras a roe Sant Bernez d'an dud renet
gant an war hent ar zantelezh : « Pa fello d'eoc'h kinnig eun dra bennak
da Zoue, bezit war evez da ginnig anezan dre zaouarn dudius ha dereat-
meurbet an Itron Varia, nemet c'hoant ho peze da veza argaset ».

Ha n'eo ket evelse e ra er bed ar re zister e-kenver ar pennou-bras, evel m'hon eus gwelet? (parabolenn aval al labourer-douar). Perak ne vefemp ket-douget gant ar c'hras d'ober kement-all e-kenver Doue, Hen hag a zo ken uhel-uhel a-zloc'h deomp, ni hag a zo dirazan nebeutoc'h eget eur vleudenn? A-hend-all, ha n'hon eus-ni ket eun alvoka-dez, ken galloudus ma ne vez morse nac'het; ken ijinus, ma oar-hi an holl zoareou da c'hounid kalon Doue; ken mat ha ken karantezus, ma ne argas-hi den ebet, daoust pegen diste ha drouk e vefe?...

(Sant Loelz-Mari a Vonfort).


WAR HENTOU BREIZ



War zao paotred war zao mer-c'hed




Ar c'hillog ruz en deus ka - net



Di-hu-nit a ze-hou hag a gleiz! Hop hei!



Holl hep di-e-gi war hen-tou Breiz.



Dalc'hit dieub an 22 a viz eost : ezomm a vo ac'hanoc'h e gouel ar Bleung-Brug, e Kastell-Paol. Eun devez Kaer e vo!

WAR HENTOU BREIZ

I

War-zao, paotred! War-zao, merc'hed!
Ar c'hilhog ruz en deus kanet.
Dihunit a-zehou hag a-gleiz: Hop! Hei!
Holl hep diegi war hentou Breiz.

II

Echu an noz hag an diskutez:
Dindan an heol strak ar gwinitz:
Ezomm a vo mederien e-leiz: Hop! Hei!
Holl a-gorf-roched, war hentou Breiz!

III

Dre ar maeziou, baleomp skann,
Leiz hor skevent aer-vat an hanv;
Hor c'halon vo paket start 'n hor c'hreiz: hop! Hei!
Pa vo ret gouren, war hentou Breiz.

IV

Ra dregerno, atao, 'n hon touez
Sillabennou skiltrus hor yez!
Komzomp ha kanomp brezoneg reiz: Hop! Hei!
Bezomp gwir Vreiziz war hentou Breiz!

V

Karomp hor Breiz, karomp hor bre,
Hec'h istor gaer hag hec'h ano:
He skeudenn dirazomp, noz ha deiz: Hop! Hei!
Bezomp tud feal, war hentou Breiz!

VI

'Vit digeri dimp an ero
Ez omp ennan pennek hirio,
Hon Tadou o deus poaniet gant feiz: Hop! Hei!
Heulomp o roudou, war hentou Breiz!

EVNIG PENN-AR-C'HOAD.



Ar Brezel e Breiz-Izel

AR PEZ A C'HOARVEZAS E KLEDER
D'AR 6 A VIZ EOST 1944

CANT MARI SENT

« D'ar 6 a viz eost, eur c'helou burzudus a redas : an Amerikaned o tremen e Berven !

Mantret ha diskredik e chom an dud o klevet kement-se, rak n'edod ket c'hoaz ouz o gedal war douar Bro-Leon...

Ar zul a yoa, kaer an amzer, setu ma redas Klederis etrezek Berven, evit beza suroc'h... Met re wir oa !

Laouen bras oa an holl gant kement-se.

Met allas !! « Levenez re abred

Ne bad ket ! »

E-doug an noz e-tre al lun hag ar meurz, ez omp dihunet gant kirri-dre-dan o tremen war hon hent bihan.

Kenta sonj a zeu em spered, evel just, eo : An Amerikaned !

A-vec'h, avat, en em gavet ar re man er vourc'h, ar vlntrailherezed en em lakeas da strakal. Aon a zavas ennon ken na c'houezen, ha me da c'hervel Job a oa kousket er gambr, en tu all.

-N'ez ket da gaout aon, eme Job, goude beza klevet e-unan, an dra-ze, moarvat eo an Amerikaned pe baotred ar « brouskoad » o skuba an nebeut Alamaned a jom c'hoaz war hon tro.

Dienkrezet gant ar c'homzou-ze, e krogis a-nevez gant va c'houk.

Met, war-dro peder eur, « otoïou » adarre war an hent, ha stlakerezh evel diagent en hevelep lec'h. Ne badas ket pell, a drugare Doue.

Mall warnomp da welet an deiz o c'houlaoui, evit gouzout ar wirionez.

Abred eta, edomp warzao.

Goloet an amzer. Eur vogidell deo o c'helei an douar.

Ne oa kont ganeomp nemet eus an Amerikaned.

E-keit-se, e teuas Hamon ar Jak da gerc'het laez, evel m'oa kustum.

— Arabat d'eoeh kredl, emezan, e vije bet tremenet Amerikaned dre aze e-doug an noz ; eur vandennad « Voched » ne lavaran ket, Boched hag a denne war an dud a zo bet savet evit o gwelout !

Met, ar wazed a c'hoarze goap ouz e glevout.

— Boched ! n'emaout ket mat, kement-se ! Sell'ta ouz ar roudou a zo war an hent aze hag e well.

E-keit ha ma oa tabut ganto evel-se, e klevet eus a-bell ar memes trouz o tostaat.

Gwelout a reot, bremalk, gant plou eman ar wirionez, eme Hamon adarre.

Mont a reomp er porz.

Ha ni ha chom bamet, o welout kirri-tan karget a Alamaned, goloet a skourrou glas o tremen dirak hon daoulagad.

E-lec'h kaout aon ha mont kuit, e chomomp er c'hontrol, da zellet outo, en eur c'hoarzin goap, o welet o aer skulz hag o fennou tenval.

Ya, trec'het int d'o zro, setu ma tec'hont dre an henchou bihan, war-du Brest, hag eno e stourmint c'hoaz marteze eur pennadig.

E-pad eur c'hard eur e tremenont hep ehan. Seblantout a reont dont eus a bell, rak poultrennet eo o dilhad. Darn zoken a zo kousket, aer fall d'ezo.

O fuzulioù, avat, a chom buket ganto en o daouarn, prest da denna. Doriou an « oto » diouz eun tu a zo lammet kuit, evit gellout tec'het, moarvat, aesoc'h a-ze, ma savje bec'h warno.

Setu ar « golonenn » aet e-biou, ha sioul an traou adarre.

War-dro seiz eur, eur pezh tennou a strakas diouz kostez ar c'hoad pin ; hag an tennou a zute end eun a-zloc'h hor penn. Ar wazed, hag a oa d'an ampoent-se o vont d'ar park, a rankas dont endro.

Gwazed ar Feunteun-Veur, hag a oa o labourat er park tosta d'al leur a zu--man, a rankas distarnia ivez, ha lakaat o c'hezeg, unan e skeud ar c'harz, hag eben er c'harrdi a-zu-man.

A-benn eur pennadig, an traou a zioulaas a-nevez.



Ar wazed a oa adarre war-nes mont d'ar park pa voe klevet o tont war an hent eun trouz kalz pouneroc'h eget araok.

Ha ni war an hent. Hag e weljomp o tont, en despet d'ar vogidell, eun « tank » pe « oto-mindrailherez ».

Ni merc'hed n'hor boa morse c'hoaz gwelet kement all.

Evit gwelet gwelloc'h, e redis d'ar solier da zellout el lukarn.

Maodez, va zad, Job Combet, Ifig ha Louis ar pastor bihan a oa e dor ar c'hraou.

Agoust hag Alan Karoff a yeas d'an Dosenn, a-drenv ar c'hraou. « Eno, emezo, e weljont gwelloc'h ».

Va mamm, Liz, Annaig hag eun amezeg deuet da gerc'hat laez a jomas en ti da zellout dre ar prenest.

Eus al lukarn, digor ganin, evit gwelout gwelloc'h an tank, her c'hlevis o tremen dirak al leur hag an ti.

En em gavet dirak ar c'hraou-zaoud, e welis ar benveg brezel dianav c'hoaz evidoun betek-hen ; eur pezh karr-tan mindrailher goloet a skourrou gwez.

Tri pe bevar zoudard a oa war e c'horre, hag a bep tu dezan, kement all o vale, gant o fuzulioù buket, evel m'o defe aon rak eun enebour ha prest da denna evit an distera trouz.

Ken mantret e oan bet o welet kement all, ma redis d'an traon, n'ouzoun ket pe gant va aon pe gant prez da gonta d'ar re all ar pezh am boa gwelet.

Met, en em gavet en e zouez, n'am boa ket amzer da zigeri va genou, m'edo an tennou o koueza puilh war an ti, ha m'oa bruzunet al lukarn m'edon o sellout ennan eur pennadig araok. Ar vein-skilnet a o terri hag o koueza.

Biskoaz c'hoaz, n'hon devoa bet kement a spont en hor buhez.

A greiz pep kreiz, e klevjomp eur vlejaden ken truezus ma sklases ar gwad en hor gwazied. Unan eus ar zaoud, moarvat eo a oa o vervel.

Gwasoc'h gwas e vez tennet war an ti ha war ar c'hraou.

Kaout a rae deomp e oa deuet hon eur diweza. Hor pemp en em vodjomp an eil krog en eben, da lavarout hon akt a gontrision, hag hon lakaat e doare da vont dirak Doue. Kalonek ha gant keuz e c'houlenjomp pardon eus hon amzer dremenet.

Pedi a raemp c'hoaz endra ma strake spontus ar mindrailherezed ermaez. Hor pedenn a roas deomp muioc'h a nerz. Sellout a raemp gant karantez ouz an traou a oa endro deomp hag a garemp kement, o c'he-dal beza bruzunet gant taoliou ar bleizi kounnaret.

En eun taol kont, setu eur pezh ragach o tont el leur. Gwelout a rejomp dre ar prenest o fennou fuloret, o fuzuliou ganto en o daouarn, prest da skei war ar c'henta a weljent. Evel aon o devoa koulskoude o tostaat ouz an nor.

Unan ac'hanomp, hardisaet eun tammig, a zigoras ar prenest en eun taol, en eur ober kerkent eul lamm a-drenv gant aon rak eun tenn bennak.

Hep gouzout re petra a raen, ez is neuze dirak ar prenest digor bras, en eur youc'hal gant va daouarn er vann : Truez ! Truez !

Ar pemp pe c'houec'h Alaman a oa el leur. a zeuas, mantret holl dirak ar prenest. Komz a raent kenetrezo, evel teneraet eun tammig.

Neuze, evit rei d'ezo da gompren ne oa nemet merc'hed en ti, e lavaris an nebeut geriennou alaman a ouien : fräulein hepken ! fräulein hepken ».

E-lec'h chom sioul avat, evel ma seblantent beza, e teujont da gounnari. Unan anezo a daolas en ti eun dra bennak, a ruilhas betek treid Liz a oa d'ar poent-se e penn ar gwele kloz. Eur zell a ris evit gwelout petra e oa. Bez en devoa furm ha braster eur vi. Lavarout a ris da Liz, chacha huan a-drenv, rak bez e oa moarvat eun dra bennak danjerus.

N'am boa ket c'hoaz peurlavaret va ger na Liz aet daou gammed pelloc'h, ma tarzaz an doare vi-ze, en eur ober eur pezh trouz ha moged. Dre c'hras Doue, droug ebet ne erruas gant hini ac'hanomp, nemet Liz a bakas eun drailhenn zir en he gar, hep ober d'ezi, evelato, nemeur a ziaes.

Spontet holl e redjomp war-du penn a-drenv an ti. Met en eul luc'hedenn, setu eun trouz all spontusoc'h, o terri war an hevelep tro, an doriou hag ar sklotur etre an daou di, gant ar meleziour bras a oa outi a istribilh, a gouezas e mil damm war al eur-zi simant.

Na pebez strafuilh, en hon touez, va Doue ! Azalek neuze, e oa leun an ti a voged hag a c'houez fall... Repu ebet n'hon devoa ken. En eur grena evel eur bern deliou sec'h, e c'hortozemp taol ar maro.

da gendec'hel

Yaouankizou Breiz ! E niverennoù da-zont Kroaz-Breiz, e kavot an danvez da gana, da zisplega, da c'hoari, e gouvel bras ar Bleun-Brug.

Maro an Aotrou Saout

D'an 22 a viz eost diweza, e Kastell-Paol, eo aet d'ar bed-all hor c'henvroad karet an Ao, beleg Gwilhaou Saout, bet person Sant Wazeg.

Ganet e voe e Sant-Neven ha belegeget er bloaz 1904. Anvet e oa bet da berson Sant-Wazeg wardro 17 vloaz 'zo, goude beza bet kure e-pad pell amzer e Kerfeunteun, e-lec'h ma roas e skoazel hag e arc'hant da zevel ti-skol Sant-Charlez deuet diwezatoch da veza. an toullbac'h euzus a voe klozet ennan kement a vrogariourien didamall.

Roet en devoa e zilez eus e garg a berson Sant-Wazeg e miz gwengolo warlene, rak ne oa mui yac'h a-walc'h da gendec'hel pelloc'h ganti.

Neb en deus bet an eurvad da anavezout an Ao. Saout n'eman ket war-nes e ankounac'haat. Eur beleg santel e oa, hag eur brogarour eus an dibab. Dalc'hmat en deus bet harpet an emsav breizad hag hec'h tud yaouank, war-du ennan. Hen eo a allas hag a roas digemer d'ar Vretoned yaouank a zavas skol « Ober », e-kerz eur vodadenn graet e Sant-Wazeg, breman ez eus 15 pe 16 vloaz.

Troet e oa kalz an Ao. Saout gant istor Breiz ha gant lennegezh hor bro. Eul levraoueg kaer en devoa ha plijout a-walc'h a ra e d'ezan presta e levrioù da biou bennak o goulenne digantan da studia.

Troet e oa ivez ar beleg breizad gant hor Zent koz, diazeziourien hor bro, hag e vrasa preder a oa studia o buhez. Lakaat a reas kizella gant an arzuour Youinou eus Douarnenez, e d'erc'h eur wezen d'ero deuet eus Koad Garros e-lec'h ma vevas an den santel Gwazeg, skeudenn heman gwisket evel eun eskob, hag a c'heller gwelout c'hoaz, hirio an deiz, war eur zichen e iliz ar barrez en deus roet ar sant-man e ano d'ezi. En deiz ma voe benniget ar skeudenn e voe eur gouel dispar e Sant-Wazeg.

Pedet e voe da zont dez an eun nebeud gwazed eus an emsav hag a zikouras dougen e prosesion war o diskoaz, an delwenn gaer lieslivet, hag a bouez meur a gant lur. Kement-man a c'heller gwelout c'hoaz, luc'hskeudennet war eur gartenn-bost a gaver da brena e Sant-Wazeg.

Nebeut amzer goude ar gouel-ze, e lakaas an Ao. Saout sevel, gant ar skrivagner Loeiz ar Floc'h a oa beo

c'hoaz d'an ampoent, « buhez » Sant-Wazeg, da veza displeget war eul leurenn-c'hoari dirak tud ar barrez. evit ober d'ezo d'erc'hel sonj eus o zant paeron gwelloc'h a-ze. War am eus klevet, eo bet displeget ar pezh-c'hoari santel da Zant-Wazegiz eur wech pe ziou da-vihana, e gwerjez ar presbital, gant eur c'houch paotred yaouank eus ar barrez. Hogen n'eo ket bet embannet morse e nep lec'h « buhez » an eskob-lean a ledenez Garros.

Eun den madezeus e oa an Ao. Saout ha dalc'hmat e veze prest da rei digemer, en e di hag ouz e daol, d'ar vignoned a yae alies ha niverus d'e welout. Ma oa anavezet mat gant kalz eus e genvroiz, en deveze ivez darempred gant tud a ziavaezbro hag a blijfe d'ezo ar brezoneg. E-touez ar re-mañ e c'heller envel an Ao. William B. Shepard Smith, kelenner war ar yezou keltiek e skolver Columbia New-York, hag a dremenaz war-dro c'houec'h miz e presbital Sant-Wazeg o studia hor yez. An Ao. Smith-ze eo oberour gouizie an « Dictionnaire Etymologique de la Toponymie Bretonne » bet embannet nevez 'zo gant al « Linguistic Society of America », eus Baltimore, war eur stagadenn d'ar gelaouenn « Language ».

E miz du 1944, dre urz ar jeneral Allard, e voe dastumet war-dro 2.000 Breizad dincoaz, brogarourien an darnvula anezo, ha kaset da gamp Margueritte, e Roazon. An Ao. Saout o oa en o zouez hag eno e rankas chom, e-pad eun nebeud sizunvezioù, da c'houzanv dismegans ha dienez. Pa voe laosket kuit edo krog ennan, moarvat, ar c'henved her c'hasas d'ar bez. Siouaz ! n'eo ket rouez ar Vretoned gredus a bakas o fall eveltan, d'ar mare-ze, e prizonioù ar C'hallaoued !

Eur beleg karantezus hag eur gwir Vreizad eo bet an Ao. Saout e-pad e vuhez. Ra gavo digemer hegarat ha laouen, a-berz hor Zent koz hag eneoù hor c'henvroiz aet d'ar bed-all, e Breiz ar Baradoz, hor gwir vro.

YANN AR GWALC'H.

KELEIER

E Iliz-Veur Kemper, d'an 28 ebrei, eo bet kanet servij deiz-ha-bloas an Aotrou n Eskob Duparc, « Eskob ar Vretoned », ha dispaket ar bez savet en e enor gant, an Ao. Bazin, an arzour brudet en doa savet dija skeudenn an Ao. Duparc e Kloardi bras Kemper, e 1933.

An Ao. Kardinal Roques eus Roazon, ha 9 Eskob all, gant 4 Dad-Abad, a enoras ar gouel. Goude an oferenn, en eur brezegenn helavar meurbet, an Aotrou Eskob Grente eus ar Mans, a displegas dirak eur bobl tud, buhez an Ao. Duparc: dre c'halloud ar c'homzou flouraet gant ar skrivagner brudet, e teus adarre en hon touez, evit eun nebeud amzer, an hini a voe hon Tad epad 38 bloaz.

An absolvenn, e-kichen ar bez nevez-savet, a voe roet, goude ar brezegenn, gant Aotrou Kardinal Roazon.

Landerne ha Kemper o deus gwelet diou vodadeg diwarbenn ar brezoneg d'an 18 ha d'an 22 ebrei.

An 120 kevredigez a Vretoned eus Paris ha wardro, o deus en em unanet, nevez zo, evit sevel Unvaniez Difennourien ar Brezoneg (an U.D.B.): youl houman eo kreski nerz ar brezoneg, ha goulenn ma vo kelennet en holl skolioù a Vreiz. Nebeud amzer arak, Skol-Veur ar Stad e Roazon, he doa goulennet ive digant Mi-

nistr an Deskadurez ma vefe degemeret ar brezoneg er Vachelouriez.

Bodadegoù Landerne ha Kemper a voe graet evit sevel e Penn-ar-bed eur rann eus an U.D.B.-E Landerne e loc'has al labour. -E Kemper, war c'hali an Ao. Du-jardin (Loelz Lok) eus Lokourman, e teuas d'ar vodadeg an Ao. Vour'h, kuzulier ar Gouarnamant. -an Ao. Mocaer, kuzulier jeneral an Departamant, -mistri-skol ha kelennerien a bep rank hag a bep liou, nemet eus... ar skolaioù lib, -daou veieg ha daou Frer, rener Kalc'h Keltiek Brest, -an Dimezell Gourlaouen, renerz skol dre lizer Douarnenez, -an Ao. Breton, tenzorier ar Bleun-Brug, hag all.

Divizet e voe sevel eur rann d'an U.D.B.: tri eus izili ar vodadeg a gemeras ar garg da zével ar rann hag e reolennou. -Divizet e voe ive harpa ar goulennoù a vezo graet da lakaat kelenn ar brezoneg er skol.

Betek-hen, Breiziz n'o deus kavet nemet skouarn vouzar a berz Bro-C'hall: pegwir eo houman pouner-geio, e vo ret marteze youc'h al ha youc'h al a vo graet betek rei da glevout d'ar re vouzar!

Ma kar ar Vretoned da vihana !..

Kerent ar Vretoned vihan, ha Bretoned oc'h ?

Ha petra 'zonjit ?

Y-F ar F.

Lennit

Alain de Cornouaille : PENHOAD (Spes. Paris 1947 - 442 pages)

Al levr-man a zo skrivet e galleg, met eul levr breizhat eo dre zavez an istor kouz ha dre e spered. Abalamour da-ze, ne c'hell nemet ober vad da Vreiz ha plijadur d'ar Vretoned.

A-dreuz al levr panna-da-benn e kavomp kudenn Vreiz : penaos kompren ar vuhez e Breiz, ha degas gwellaerñ enni ? En eun tiegez bras eus Bro-Gerne, eur familh a-bez, nerz ha youl-kreski enni n'eus fors pegement, a glask he hent a-dreuz al labourou hag ar plijadurioù pemdeziek : met ar sperejou er familh a zo rannet e daou eum : ar vamm ha daou eus he bugale, paotr ha merc'h, ne welont doare da greski ha da wellaat nemet o c'hallekaat pep tra en dro dezo. An tad hag ar vugale all, ar verc'h kosa aet da verc'h-kaer en eun tiegez all e-kichen, ar mab hena hag a grogo dizale en tiegez, eur mab studier c'hoaz e Kemper, . . hag ive eun contr chomet da goza, a fell dezo mont war arak hep nac'h amzer dremenet an tiegez hag ar vro, met o tenna anezl kement a zo mat da ziazeza ar wellaenn a glaskont degas, int-i ive, en o doare-beva.

Ar rummad diweza-man a zo gwriziennet start en o douar, hag a gar anezl, kement ha m'eo distag ha laosk ar rummad kenta.

Etre an daou rumm sklaer eo, ez eus brezel, gwech a daolioù spilhou hepken, gwech avat gant komzou e'houero... Furentes an tad hag an contr a zebiant gounit iachenn a-nebeudon, hag a grign ar rummad all, dreist-holl eus kostez ar paotr yaouank... Koulskoude pa echn al levr, n'ouzer ket re vat c'hoaz penaos e vo peurbunet ar gudenn, ha betek pelec'h e vo renevezet an unvaniez doun etre holl izili ar familh : re e vo gortoz an eil levrerñ evit her gouzout da vad, ha fizians hon eus ne zaleo ket da zont er maez d'he zro.

Evel m'eman, al levr kenta a zo plijus da lenn eus an eil penn d'egile, ha talvoudus eo prederia warnan. Ne c'hellomp nemet alia kement Breizad a glask e hent gant bolontez vat, da brena al levr, rak eur sklerijenn e vezo evit ren e vuhez.

Y-F. ar F.

Ar merour : M. l'Abbé BLEUNVEN
Recteur, PLOMELIN, par Quimper

Ti-Moulerer Kreiz Breiz
36, Rue Richard-Lenoir, RENNES

Korn ar Merour

Lennerien ger

Setu eta niverenn genta Kroaz Breiz, deuet er-mêz. Evit enor hor brezoneg, evit ma raio, suroc'h, dudi ho taoulagad hag ho kalon, hon eus c'hoantaet he ficha, koanta m'hon eus gellet, evel a welit.

Hervez an digemer a vo graet dezi hag hervez ar skoazell a zigasoc'h deomp, e klaskimp ober c'hoaz gwelloc'h.

Hor ger a garfe beza : *Atao war wellaat.*

Diaes eo plijout d'an holl, hag, hep mar ebet, e vezo kavet meur a abeg e Kroaz Breiz.

Laouen e resevimp diganeoc'h an ali hag an hollen a vez roet, e Breiz Izel, d'an nep a c'houlenn...

Goude ar c'homzou kenta-ze, gwelomp breman penaos hon eus sonj ez afe ar stal ganeomp en-dro.

AR C'HOUMANANTOU.

Komans a reont gant an niverenn-man, evit echui gant fin ar bloaz. Ne reomp ouzoc'h eta nemet eur marc'had a eiz miz.

Gant ar geraouez a zo hirio war ar paper, gant ar mizou bras hor beus, o loc'h evit ma c'hellimp padout, e rankomp skei uhelloc'h gant ar prizioù.

Setu aman o roll :

Koumanant ordinal : 200 lur.

Koumanant a zikour : 300 lur.

Koumanant a enor : 500 lur.

An niverenn-man : 25 lur.

N'emaomp ket o klask gounit arc'hant, met o klask rei deoc'h boued spered, aozet evidoc'h gant tud ho pro. Diouz ma'z ay an traou ganeomp, ha diouz niver al lennerien a c'hellimp da baka, e c'hellimp, fizians hon eus, bihanaat ar prizioù-ze, gant ar bloaz nevez.

An niverenn-man a zo kaset d'an darn vuia eus lennerien goz Feiz ha Breiz hag ar Vuhez kristen. Meur a hini, siouaz, eus ar re man a zo aet du-man, du-hont, abaoe ar brezel, ha ne vezint ket kavet...

Dre garantez evit hor Feiz hag hor brezoneg, hor zikourit, lennerien ger, d'o c'haout a-nevez.

Ma plij ar gelaouenn-man d'eoc'h, grit brud en-dro dezi, skignit, embannit anezi, digasit deomp anioù ha chom-lec'hioù ho kerent hag ho mignoned.

Met dreist pep tra na zaleit ket d'en em zervichout, hoc'h-unan, eus ar « Mandat carte » a gavoc'h aman.

Na jomit ket da varc'hata : dioustu, raktal, eo e c'houlennomp ouzoc'h digeri deomp ho kalon hag ho yalc'h.

Gant sikour pep hini ac'hanoc'h : «ma plij gant Doue, da vat ez ay ».

Kroaz Breiz a lavar mil bennoz d'ar re o devezo ar vadelez da rei dezi eun tamm skoazell.

LAKIT EVEZ BRAS

1. Evit kement a zell ouz danvez-skrid ar gelaouenn : skriva da rener Kroaz Breiz : Mr l'abbé Jean-François Falc'hun, professeur au Grand Séminaire de Quimper (Finistère).

2. Evit kement a zell ouz koumanantou ha profou, skriva da : Mr l'abbé Laurent Bleunven, recteur, Plomelin, par Quimper, (Finistère). C.C.P. 21.802, Rennes.



AN NEVEZ - AMZER

(Ar werz-man, tennet eus oberou Gwennaël, a vo embannet dizale gant eul lodenn eus e werziou all.)

Teuzet an ere'h war an douar,
An amzer a zo deuet klouar ;
A neubeudou, dre an daou benn
E weler an deiz oc'h astenn.

An heol yen a zell en ti
A zo hirio berroc'h e fri ;
Drouk-livet 'oa, neus ket da nac'h,
Hogen adarre eo deuet yac'h.

Adarre en deus kavet gor.
Na chomit ket serret ho tor,
Da ludui war an oaled.
Ar maeziou a zo kaer da welet.

Sellit, an douar a oa noaz,
En deuz gwisket e vantell c'hlas.
Pep tra a boulz ; al liorzou
A vo bremaik leun a vleuniou.

Ar seo, sunet gant pep gwrizienn,
A ro gwad nevez d'ar wezenn ;
Ar skourr a vev, ar broust a darz.
An evned a richan er c'harz.

Krog el labour da c'houlou-deiz
Al labousig a ra e neiz
Gant kinvi sec'h ha morblu flour,
Kuzet mat ouz an enebour.

Eus he zi plouz, ar wenanenn
A nij a vleunvenn da vleunvenn
Ha ne zistro nemet sammet
A zanzez mel prim dastumet.

Nevez-amzer, nevez-amzer !
Gant pebez mall az kortozer !
Ha n'out-te ket amzer nevez,
Ar yaouankiz hag ar vuhez ?

Eun deiz, goude pred ar maro,
Skeudennet gant ar goanv garo,
Ni 'vo evel lili ha roz
E liorz kaer ar Baradoz.

GWENNAEL.